

## AR BRAGOU MOAN.

HS

War don : 'Nn hani zimizo d'i-mé.

(Ics kerné.)

Bis. { Iannik en deuz chenchet giz, (\*)  
 Eet hé réor da veurc'hiz. (Gé.)  
 P'euz ket mez , p'euz ket mez ,  
 Koz otrouik manket ,  
 P'euz ket mez , p'euz ket mez  
 Chomm c'hoaz war (\*\*) ar mez.

Na pérag eur bragou moan  
 Elec'h unan lédan. (Gé.)  
 C'hui po mez , c'hui po mez ,  
 Pa vo kléet ho toaré ,  
 C'hui po mez , c'hui po mez ,  
 Ma otrouik kez.

Réor ré bell wär ann dorchen  
 A ia da bladigenn ; (Gé.)  
 Bragou moan , bragou moan  
 Zo ret da gaout neuze ,  
 Bragou moan , bragou moan  
 Vo roet d'ar potr Iann.

Iann kulotet enn-giz-sé ,  
 En-em-gav eur potr tré. (Gé.)  
 Treuz hé dok , touz hé benn ,  
 Mouchour war hé voellou ;

(\*) Ar G dirag E hag I , azo ével dirag A , O , U .

(\*\*) Al lizérenn W a vez l'kéat elec'h V , U , OU . War , livrit , par , pé ouar . Eur wéren , livrit , eur vérien , pé sur wéren pé sur oueren .

Treuz hé dok , touz hé benn ,  
Hag hen kerzat plenn.

Mez mar welfec'h hé gof-gar  
Ne gafec'h ked hé bar ; ( Gé. )  
Bragou moan , bragou moan  
A viro kement-sé ,  
Bragou moan , bragou moan .  
Treud ann traou dindan.

Eur breton enn hé zillad  
A ziskoez éo potr mad. ( Gé. )  
Bragou gloan , gouriz ler  
ENN-dro da vignonik ,  
Bragou gloan . gouriz ler  
Zo traou ré bouner.

Eur breton a holl-viskoaz ,  
A zalc'h mad d'hé benn-baz. ( Gé. )  
Gwalennik glaz pé wenn  
Fel d'ann démézelik ,  
Gwalennik glaz pé wenn  
Skanvoc'h da zougenn.

Hon tud koz gand gwirioné  
Gwéchall a lavaré : ( Gé. )  
Bragou moan , bragou moan ,  
ENN eur pégad labour ,  
Bragou moan , bragou moan ,  
▲ vo bépred goan.

Hor mammou pa oant iaouank ,  
Merc'hédigou divank , ( Gé. )  
Eur zonik a ganent

— C'hui , merc' hed , deskit-hi . —  
 Eur zonik a ganent ,  
 Kléet petra larent :

« M'am bézo biken eur goaz  
 « Vo unan bragou braz. (Gé.)  
 « Bragou moan , bragou moan ,  
 « Pez zo'barz ne dall tra ,  
 « Bragou moan , bragou moan ,  
 « Né dall ked ar boan. »

Mar t'ez bet digand da dad  
 Askorn ha diouvorzad , (Gé.)  
 Dalc'h mad d'as bragou braz  
 Mignon mar em c'hrédez ,  
 Dalc'h mad d'as bragou braz  
 Na vézi ket was.

Mez mar d'oud eunn denik flask ,  
 Mar ma ta réor da glask , (Gé.)  
 Bragou moan , bragou moan  
 Zo mad d'id da gémer ,  
 Bragou moan , bragou moan  
 Den na lako van.

Bragou moan e tent er bed  
 Tri faéron en deuz bet : (Gé.)  
 Puchérer , garik-treud  
 Ha iannik kergordenn ,  
 Puchérer , garik-treud . . .  
 Tri dibuner neud.

Puchérer zo'r freullen den  
 A gosté Rosporden ; (Gé.)

Krouget hé vragou striz  
 Béteg hé ziougazel ,  
 Krouget hé vragou striz  
 Vel eur c'hoz bourc'hiz.

Garik-treud , bep noz timad ,  
 A ié da grampoézat. ( Gé. )  
 Hag ar vrud a lavar  
 Gand ki Marijanik ,  
 Hag ar vrud a lavar  
 Ma éet hé gof-gar.

Kergordenn hé benn touzet  
 Gand hé c'hallektréoued , ( Gé. )  
 Zo bet eur bloa pé zaou  
 O teski c'huitellat ,  
 Zo bet eur bloa pé zaou ,  
 Barz ar galéaou.

Bréman'ta kredid erfad ,  
 Evid ho prassa mad : ( Gé. )  
 Mod ar mez gand mod ker ,  
 Spont ann dud aféson ;  
 Mod ar mez gand mod ker  
 Ra d'hé kaout donjer.

C'hui péré a red bemdé  
 Warlec'h gizou névé , ( Gé. )  
 O chench préeg , o chench mod  
 C'hui rei é-ber-amzer ,  
 O chench préeg , o chench mod ,  
 Tud fal doc'h tud sod.